

Nep 'neus choant da gwela truer
Mont dilun da kastelnever

ha gwela krouga ha deri
Brawa greg ozach zo hen ni.

Kastelnever

Kri vije r'halon na welche
En kastelnever neb' viche

O klawet eur plachik pemp bloas
ho tisput ouz ar Senechal

beg giv outan he levere
Och an Douar en em stoue.

- Lest ma mamik da zont gan-hin
Otro Senechal padonit-hi.

- Ba en mirit, hi vo barned
Chwi va plachik her pelleet

- Lest da zonet d'ar ger ma mam
Cvit-hi me ha iell en tan.

- Neket lavaret gant Doue
he varv an eil wid e gill.

- Na perag ~~sta~~ ^{sta} e tenas
Da vered widomp var ar groas ?

-Minorerik it-hu d'ar ger
Da lakat choas d'ach ur mires

Da lakat choas d'ach ur mires
Pe m'ar c'heret ur servijer.

- Ne meus ket erom a mires
Na ken neubent a servijer.

Na ken neubent a servijer
Nemet ma mam da zont d'ar ger?

-Minorerik ed a lesse
Ho mam a iell a ben tride.

Ar plachik pemp bloas houtene
De maeroner tride goude: h. d. r. an

- Ma maeroner din leveret
Ma mam baou p'lech e chomet?

- Minorerik n'em c'honsolet
Birviken ho mam na wellfet

Bed-he a krouget a losget
he lada gant n'avel gweritet. niet

Ar minorer vel ma klevas
Vur an douar e nem dollas.

- Ouman zo dime Kalonad
Kouls a beurs mam ag a beurs tad

~~Ma mam krouget n'kastel never
a ma zad lorned er mener.~~

Ma mam paeron din leveret
Petare torfet en deus gret.

trifet awalch en deus gret

- ur bugel bihan n'deus ganet
Ev badayant n'eus-han laret *bidien*

ha tollet en ur forn goret,
Me, Siwas, meus-hi Diskuillet.

- Ouman a zo din Kalonad
Krouget ma mam lorned ma zad

Ma zad a neus eunt i never
Vat eus'horn a lantorenever *(and blomm)*

Leih na ia den a bed d'en ke
Me ia d'he gwelket kouskoude.

D'hen gwelket e zenkan monet
C'vit kass deran ur rochet

evit kass deran ur rochet
Seiz mis zo neo-ke chenchet.

- Ma zedig paour diorit ho tor,
ho bugelik zo' houl dior!

zo deud da digass dañh r'zochet
Seiz mis zo himi n'ho huns chenchet

- Ma bugelik mar gound are
Kers-te buen a halessa

Ma chenchfe n'avel a goste
Ta hifamfe dre doul n'alche

Ta hifamfe dre doul n'alche
E ver reurendik koulz a me.

- Treidn'avel dre ma karo
Toul dor ma zad me a chomo.

Ne meus nemet-hoc'h ken ma zad
Ouman a zo dimp kalonad.

- Ma bugel paour din leveret,
ho mam pelec'h eo chomet?

- Krouget eo bed a losget
he luda gant n'avel gweritet.

- Ma bugel paour din leveret
Petare torfet en deus gret?

818
- ur bugel bihon n' deua bed
eb badayant e heo lachet. *luit*

- Berag ha deus gret kement-se
me wa beo hag hen anbarje.

Ma bugelik ker, pelleet!
M'ar tro n' uel viet klanvet

Mar troffe n' avel en gerred *loqueur
ur*
Ma plachik ker chwi ve lachet

- Neus kas he petu a troio,
hen ho kichen me a chomo

hen ho kichen me a chomo
ma tadik petek ar maro.

Ra po erom chwi en galvo
hag ho rochet me ha kanno.

-

Bed he doa re fors kalonad
ar bugel ker evit he oad.

Rag mervel enon a eure
hen kichen he tad er mene.

-

